



KANTIK SANT KORNELI

Var don : Rumengol.

DISKAN :

Sant Korneli, *pedit Doue*
 D'hor miret *ya'h korf hag ene* ;
 Plijet ive diouz hor *lôned* (1)
 Pellât peb drouk ha peb klenved.

Korneli, en trede kantved,
 Da ren an Iliz oue choazet ;
 Kalet meurbed oa an amzer,
 Pa zavas var gador Sant Per.

E meur a lec'h, d'ar mare-ze,
 Goad ar gristenien a rede ;
 Bez' oa kalz trubuill a hent all
 Gant heretiked displeal (2).

Ar goal dud-se Sant Korneli
 Ho c'hondaonas heb damanti ;
 Vit brassa mad ar gristenien
 E tifennas ar guir greden.

Kalz euz ar re oa bet tromplet.
 A ziskouezas keuz d'ho fec'hed ;
 Ar pab santel ho resevas
 Gant trugarez ha gant joa vraz.

Goude pec'hejou braz meurbed,
 Fizianz e ranker kaout bepred.
 Daoust pegen klanv vez an ene,
 An Iliz c'hell rei ar pare.

Goassoc'h oa deut ar brezel kriz
 Graet a bep tu d'ar guir Iliz.
 An Iliz gant ar bayaned
 Bemdez e gaou oa tamallet.

Kalz tud varve gant ar vosen...
 Tamallet eo d'ar gristenien,
 A varvo kreiz an tourmanchou,
 Ma na ezansot an doueou.

Kinnig a reer d'ar pab santel
 Pe ho ezansi, pe vervel.
 Mervel a raio, ma ve red,
 Mes nac'h he feiz ne raio ket.

Da c'houzanv meur a sort tourmant
 Ez eo neuze barnet ar Zant.
 Gant fouetou plom eo skourjezet,
 Ha pelloc'hik eo dibennet.

E Breiz Izel, pell amzer zo,
 Ar Zant eo brudet he hano ;
 Gant guir fizianz e ve pedet
 Evit an dud hag al lôned.

Kalz pelerined d'he chapel
 A zeu da c'houlen he skoazel.
 E peb doare eo talvouduz
 Kass dezhan pedennou neruz.

Evit ar feiz, Sant Korneli
 A c'houzanv ar verzerenti.
 Goulennomp dreizhan ma chomo
 Ar feiz kristen stard en hor bro.

(1) Evit al lôned-korn dreist holl eo e peder Sant Korneli. *

(2) Ar heretiked-se a zonje n'he deuz ket an Iliz galloud avoalc'h evit pardouni pec'hejou a zo. Kementse a lavarent dreist holl euz ar pec'hejou braz cnep ar feiz.

KENTELIOU AR GROAZ

Var don : *D'hor Mamm Santez Anna.*

DISKAN :

*Kanomp holl, kristenien,
Kanomp a vouez huel :
Bremen ha da viken!
Henor d'ar Groaz santel !*

Bepred, elec'h ma vo
Dirazhan Kroaz Jezuz,
Eur c'hristen a gavo.
Kenteliou talvouduz.

Kroaz an tour.

Divar beg an touriou
Ar Groaz lavar dalc'hmad :
« Kristenien, d'an envou
Savit ho taoulagad ! »

Kroaz an hent.

Ar Groaz var an henchou
Lavar d'an tremener :
« Guir hent bro an envou
Eo hent Kroaz Hor Zalver. »

Kroaz an ti.

Dirag holl dud an ti,
Ar Groaz ouz ar voger
A zesk da bep hini
Derc'hel mad d'he zever.

Deski 'ra d'ar bugel
Beza bepred sentuz ;
Senti betek mervel
Zo bet buez Jezuz.

D'an tadou ha mammou
E lavar Hor Zalver :
« Beillit var eneou
Emeuz prenet ken ker ! »

Kroaz an ti d'ar c'hlanvour
Zo ive presiu ;
Ennh e kav sikour
Da veza gouzanvuz.

Kroaz ar gador-govez.

Kroaz ar gador-govez
A ro keuz d'ar pec'her.
Bet eo ken didruez
E kenver he Zalver !

Kroaz ar beziou.

Ar Groaz var ar beziou
He deuz eun nerz dispar
D'ober d'ar c'halonou
Dougen pouez ar glac'har.

Kroaz an aod.

Ar Groaz, pa ve savet
E kichenik an aod,
A ro fizianz bepred
D'ar paour kez martolod.

Kroaz ar varn diveza.

Pa zeui, da fin ar bed,
Jezuz evel barnet,
He Groaz a vo gaelet
O lugerni en aer.

En eur velet ar Groaz
An dud fall a greno ;
An dud vad gant joa vraz
Er c'hontrol a drido.

Grit deomp, Salver Jezuz,
Dre verit ho poaniou,
Gant an holl dud euruz
Mont neuze d'an envou.



KANTIK SANT IZIDOR

Patroun al Labourerien douar.

Var don : *Kelven, pe : Breuriez ar Feiz.*

*Sant Izidor benniget, patroun al labourer,
Ra vo meulet hoc'h hano dre holl, e peb amzer ;
Al labourerien douar a c'houlen ho pennoz,
Ma vint ganeoc'h sikouret da vont d'ar padroz.*

Izidor a oa ganet e Spagn, en eur gær vraz (1),
Hag eno a-vihanik 'vel eur zant e vevas.
Bet hen doa digant Doue kerent mad ha santel
Aketuz da zoursial ouz ene ho bugel.

P'e dent en oad Izidor da c'hounit he vara,
Da di eun den pinvidik ez a da zervicha ;
He vestr, hanvet Yann Vergas, hen doa kalz douarou,
Ha ganthan e oue karget da ren al labourou.

Euruz ar penn-tiegezh, pa c'hell fiziout peb tra
En dud a rank da gemer 'n he di da zervicha.
Euruz ar zervicherien a gav tiez kristen
Lec'h ma ve lezen Doue heuillet a benn da benn.

Bep mintin, sant Izidor oa fidel d'he beden ;
Bemdez zoken oa kustum da vont d'an oferen ;
He holl zevosionou vije achu abred,
Hag euz labour he zevrez ne reant gaou ebet.

Daoust ma oa en he labour ar Zant direbech kaer,
Guall deodou hen tamallas divarbenn koll amzer ;
He vestr hen dije kredet, panefed ma plijas
Gant Doue, d'hen didrompla, ober eur burzud braz.

Mestr Izidor, eun devez, da c'hout ar virione,
A ia var he zouarou da ober eur bale.
Guelet 'ra he zervicher 'kreiz eur park oc'h arat,
Gant daou El guenn 'n he gichen, daou El o labourat !

(1) E Madrid, kêr gapital bro Spagn.

Liez a vech, dorn Doue a réas burzudou,
 Evit lakât da bara muioc'h he vertuziou ;
 Eur vech, gant beg he c'harzou, 'n eur skei var an douar,
 Ar Zant 'lakas da zevel eun eienen dispar.

Meur a vech all, d'he vignoun Doue 'rentas henor :
 Diou vech ar boued a greskas dre beden Izidor ;
 Ar Zant a oa he galoun ker mad euz ar beorien
 Ma kavé gras ho guele, ha rei d'é aluzen.

Ni labourerien douar, evel hor patroun ker,
 Hervez holontez Doue, implijomp lion amzer ;
 Pedî, gouzanv, labourat, rei sikour d'an dud kez,
 Eo merk ar vuez kristen, guir hent ar zantelez.

KANTIK SANTEZ BARBA

Var don : *Bosen Elliant,*
pe Rumengol.

DISKAN :

*Santez Barba hor patronéz ;
 Plijet ganoc'h 'n ho madelez
 Pedit evidomp Hor Zalver,
 M'hon diouallo e peb danjer.*

Guerc'hez ha merzerez santel,
 Ni zeu da c'houlenn ho skoazel ;
 Ezom hon euz e pep mare
 Euz ho skoazel dirag Doue.

Aliez hon euz meritet
 Beza gant dorn Doue skoët ;
 Deut d'hor miret diouz ar poaniou
 A denn varnomp hor pec'hejou.

'Kreiz an arne, pa-z-omp spontet
 Gant ar gurun hag al lued,
 Buhan varnomp plijet asten
 Ho torn gallouduz, d'hon difen.

P'e guir ho kalloud a zo braz,
 Eur goulenn all e rafomp c'hoaz :
 Mirit an dud hag ho madou
 Diouz an tan-goall hag he reuziou.

Mirit anezho, dreist pep tra,
 Mirit anezho da goueza
 E kreiz an tan-ze bet c'houezet
 En infern vit an dud daonet.

Ho pedi a reomp c'hoaz ouspenn
 Da ziouall ar vengleuerien ;
 Bezit 'n ho micher danjeruz
 Ho fatronez trugarezuz.

Diouz toliou ar mare treitour
 Ho diouallit 'kreiz ho labour.
 Varnho plijet beilla bepred
 Vit na zigouezo drouk ebet.

Pa vo tostik fin hon amzer,
 Goulennit digant Hor Zalver.
 Ma vimp maget, arack mervel,
 Gant he gorf hag he voad santel.

KANTIK SANT ALAR

Var don : *Peger kaer ez eo Mamm Jezuz !*

DISKAN :

*En envou ha var an douar,
 Meuleudi, hag henor, ha glour,
 Ha mil bennoz da Zant Alar.*

Pa ne oa 'met eur bugel c'hoaz,
 Dija Sant Alar 'ziskouezas.
 E vije eun deiz eur zant braz.

Yaouank, e ti eun orfebrer,
 Ar Zant, o teski he vicher,
 'Zeinas eur mestr e berr-amzer.

Daoust ma oa kalz dreist ar re all,
 Ne gemeras ket ar pleg fall
 Da gaout lorc'h ha da fougeal.

'Vel Sant Alar, poaniomp ive,
 Da gaout eur guir humilite.
 Netra kaeroc'h dirag Doue.

Stard e labour e da bemde,
 Mes an holl zuliou a roe,
 Penn da benn, da zervij Doue.

Evit kerzet var he roudon,
 Ni zantellaio ar zuliou,
 Gant œuvrou mad ha pedennou.

Morse Sant Alar ne vanke,
 E kreiz he labouriou bemde
 Da ginnig he boan da Zoue.

Dalc'homp ive, ha dalc'homp mad
 'Vel Sant Alar, da zantellât
 Ar boan a gavomp en hôr stad.

Ouz an dud paour ha maleuruz
 He galon a oa truezuz.
 Bennoz d'an den madeleuz !

En he vicher, bepred leal
 Sant Alar a c'houie diouall
 Da ober gaout ouz an dud all.

He vertuziou a ken brudet
 Ma oue d'eur garg huel savet :
 Da eskop Noyon oue choazet.

Da Zoue, dre nerz he gomzou,
 He bedennou hag he skoueriou
 E c'houezas kalz enœou.

Hervez hor stad, klaskomp ive
 Gounit enœou da Zoue.
 Hor poan vo pæet mad en Ee.

Kuzuliou an eskop santel
 A viras ne savje brezel
 Etre Bro-C'hall ha Breiz-Izel.

Sant Alar, euz lein an Envou,
 Pedit, da ziouall ar broïou,
 Deuz goaleu griz ar brezelïou.

'Vit an Iliz pedit ive,
 Ma kavo frankiz adarre
 D'ober 'n hor bro labour Doue.

E meur a lec'h (an holl a c'hoar)
 Pedennou nerzuz Sant Alar
 Ho deuz gret burzudou dispar.

Aman, ar Zant a ve pedit
 Da rei he vennoz d'al loened,
 Ma vint a bep drouk diouallet.

O Sant en Ee ker galloudek,
 Ni zeu d'ho pedi kalounek :
 A bep drouk mirit hor c'hezek.

Dreist holl, ra vezimp sikouret
 Dre ho pedennou, da viret
 Hon enœou euz ar pec'hed.

Ha, pa zeni hon heur diveza,
 O abenn neuze dreist pep tra,
 Deut, ni ho ped, d'hor c'hennerza.

KANTIK ILIZ NEVEZ



Ton : *Intron Varia Rumengol.*

DISKAN :

*Var an douar evel en Ee
Kanonip meuleudi da Zoue ;
Ra vezo meulet da jamez
Gant an holl en Iliz Nevez !*

An Iliz a zo ti Doue,
An Iliz a zo dor an Ee :
O tont ennhi, stotit ho penn,
Hag it d'an daoulin, kristenien.

Pegen dous eo, Doue Santel,
Beva e skeud ho tiouaskell,
Rak ganeoc'h eun dervez hekben
'Zo dreist mil gant ar bec'herien !

Ma red ar c'haro-ken laouen
Da danva' dour an etenen,
Laotennoc'h c'hoaz, ô va Doue,
'Red varzu ennoc'h va ene.

An durzanel, ar güennili
O deuz eun neiz da c'houdori,
Mez oc'h Iliz, Salyer ar bed,
A zo va neiz muia-karet.

An Iliz eo trôn gras Doue,
Ennhi gliz pinvidik an Ee ;
An Iliz eo ti ar pardoun,
Eno ma remed ar galoun.

En Iliz eo, tud ankenniet,
E kavoc'h peoc'h, hag eürusted !
Pec'herien kœz, deut gant fizianz,
Hema eo ti an Esperanz !

En Iliz e promet Jezuz
Ouzomp beza trugarezuz :
N'o peuz eta nemet goulen,
An Iliz eo ti ar beden.

Jezuz a ro da bep-hini
Diouz ma ve bet mad d'her meuli ;
Petra 'neuze deoc'h ne roi ket
En hoc'h Iliz ker brao savet ?

Sellit outhi gant levenez.
Skeduz eo 'vel eur Rouanez :
Nag hi 'zo dudiuza da velet
Gant he zaë-mein dantelezet !

Kement kristen mad he güelo,
Sebezet-holl, a lavaro :
N'euz ket er vro-kaeroc'h Iliz,
Bennoz, henor da Neveziz !

Ar c'hoant en deuz Doue brema
Eo kaoth ho kaloun dreist pep tra :
Ho kaloun eta da Zoue
Er vuez-hag en eternite !

Santez Thumeta benniget,
Ni ho ped, ho-pedo bepred ;
Grit ma talc'ho tud ho parrez
D'ho feiz koz en Iliz Nevez.

O va Doue, p'hon deuz savet
Eun Iliz d'ho tigemeret,
Hor galvit eun deiz da repoz
En ho kichen er Baradoz !

N...

KANTIK SANTEZ ANNA

Var eun ton nevez.

*Kristenien Breiz Izel,
Meulomp holl, en deiz-ma,
Hor Patronez santel,
Hor Mamm Santez Anna.*

E kalon peb Breizad
Doun e kaver skrivet
Hano dous ar Vamm vad
A gar ar Vretoned.

Ganthi eo bet ganet
Ar Verc'hez Mamm Doue
Ha, dre-ze, eo savet
D'eur renk huel en Ee.

He galloud a zo braz,
He madelez ive ;
Ne zisprijas biskoaz
Peden he bugale.

Soudarded, moraerien,
Araok mont euz ar ger,
Diganthi a c'houlen
Ho diouall en danjer.

Er vamm gristen he fed
Evit he bugale,
Ma vint fidel bepred
Da heuill lezen Doue.

Dalc'hammad ar Vretoned,
En ho foaniou brassa,
A zavas ho spered
Varzu Santez Anna.

Hirio zo ezom braz
Da c'houlen he skoazel,
Rag a bep tu, siouaz !
Ne veler met brezel.

Er barrez, ni ho ped,
Lakit peoc'h, union ;
Kreskit ennhi bepred
Ar gwir devosion.

Itron Santez Anna,
Hor mirit deiz ha noz,
Ha dalc'hit d'hon hencha
Varzu ar baradoz.

D'AR PLACH EURUZ JEANN D'ARK

Var don : *Kelven, pe : Breuriez ar Feiz.*

*Beteg ho trôn en envou, o Jeann, henor bro Franz,
E kassomp holl hor-peden gant feiz ha gant fizianz ;
Enebourien an Iliz a zav huel ho fenn,
En ho enep deut buhan, deut buhan d'hon difenn.*

O Jeann, en ho yaouankiz, pebez tristedigez
A zantit var hoc'h ene, pa zonjit 'n hor bro gez !
Beuzet eo ho taoulagad ; fraillet eo ho kalon,
O velet hor bro garet dindan treid ar Zaozon.

O Jeann, sec'hit ho taelou. Sellit varzu an Ee;
Ac'hano e teui sikour; dont a rai heb dale.
Bro Franz a vo dilivret gant eur plac'hik dister...
C'houi eo. Stagit d'al labour. Arabad koll amzer.

O Jeann, deut eo evidoc'h an amzer da guitaat
Ar re a garit kement : breudeur, ha mamm ha tad.
Daoust d'ho rann galoun, sentit ouz ho « Moueziou » santel;
Ar Franz, en he angoni, a c'houlén ho skoazel.

O Jeann, nag a vuzudou a rá dreizoc'h Doue!
Ho par, da ren eur brezel, ne oue gulet morse.
Arme ar Zaozon, bodet en dro da Orlean,
Ouzoc'h ne c'hell ket herzel; tec'het a rank buhan.

O Jeann, goude Orlean, e trec'hit e lec'h all,
Hag enep deoc'h e klever ar Zaozon o yudal;
Mes, en despet d'ar gounnar a verv en ho c'halon,
Charlez seiz a zo sakret; startéat eo he drôn.

O Jeann, al labour dispar ho peuz græt beteg-henn
A dlese tenna bennoz, mil bennoz var ho penn.
Mes siouaz! petra velér?... Heb dalé oc'h guerzet,
Taolet 'n eur prizoun heuzuz ha d'ar maro barnet.

O Jeann, daoust m'ho peuz ato bevet 'vel eur zantez,
Kredet zo bet koulz koude kaout abek 'n ho puez.
Gant eur barnér digaloun touellet gant Satan,
Oc'h kondaonet da vervel, da vervel 'kreiz an tan.

O Jeann, setu an tantad a dle ho merzeria.
Strakal a ra ar flammou ha prest-int d'ho mouga.
Diou vech c'hoaz hano Jezuz a gouez euz ho kinou...
'Vel eur goulmik, hoc'h ene a nij prim d'an envou.

O Jeann, euz barr an envou, taolit breman eur zell
Ouz ar vro ho peuz karet, karet betek mervel.
Dre ho skouer hag ho peden, roit nerz ha fizianz
D'an dud leal a labour da zavetei bro Franz.